

An Arzhanaou, d'an 3/09/2015



PRIZ AR VUGALE 2016

Da skolaerien skolioù
ha klasoù divyezhek Breizh



Demat,

Setu navvet Priz ar Vugale, aozet gant ar gevredigezh Fea asambles gant Keit Vimp Bev. Pevar levrig (13 000 sin, aes da lenn, istorioù a-vremañ, ur c'hard- eur lenn evit ur skolaer) a vo kinniget d'ar vugale CE2-CM2 e-kerzh ar bloavezh-skol 2015/ 2016 : *Bugel ar glav*, ur plac'h yaouank eus Bro-Japan a glask kompren penaos sevel un haiku er c'hlas ; *Al laou zo deuet en-dro* pe penaos ober pa vez al loened daonet-se a chom a-hed ar bloavezh e blev hir an div c'hoar ? ; *Spont bras Mouchig*, gant Laurence Lavrand, a gont istor un avank en ur bed iskis ; ha *Dousig Tad-kozh* a zo un istor karantez bevet gant... un tad-kozh ha kontet gant e verc'h vihan.



Mat e vefe deomp gouzout pet rummad pevar levr a blijfe deoc'h kaout.

Ur wech resevet al levrioù e miz Du e c'helloc'h lenn anezho er c'hlas, en doare ma plijo deoc'h. Trugarez da gas deomp disoc'h ar votadegoù a-raok ar c'hentañ a viz Even 2016 (ur follenn votiñ 'vo kaset deoc'h e miz Mae).

Embannet e vo an disoc'hoù en ur skol e-kerzh miz Even. M'ho peus c'hoant e vefe aozet al lid-se en ho skol, kelaouit ac'hanomp. Moaien e vo deoc'h kejañ gant ar skrivagnerien ivez, evel m'eo bet graet er faou ar bloaz-mañ. Enrollet oa bet an holl istorioù gant Sten Charbonneau, trugarez da venegiñ war ar follenn respont m'ho peus c'hoant kaout ur bladenn arc'hant (digoust), pe kentoc'h pellgargañ an enrolladenn war lec'hienn fea pe war hini Keit Vimp Bev. Kaset e vo deoc'h keloù dre bostel gant al liammoù.

Priz al levrioù : 15 euro ar rummad 4 levr/ 10 euro ar rummad ma vez prenet unan evit pep bugel.

Profet e vo un dastumad da bep skolaer !

@ galon

Fanny Chauffin, prezidantez fea

FOLLENN ENSKRIVAÑ

Priz ar Vugale 2016

Skol :

Skolaer(ez) e karg :

Postel :

Chomlec'h :

Kod Post : Kêr :

Er skol e vo bugel o kemer perzh, rannet evel-mañ :

..... e CE2

..... e CM1

..... e CM2

Gourc'hemenn a reomp UN NEBEUD DASTUMADOÙ evit ar c'hlas : 15 euro x = euro

Gourc'hemenn a reomp UN DASTUMAD EVIT PEP BUGEL : 10 euro x = euro

Un dastumad a vo profet ouzhpenn d'ar c'helenner.

Levrioù PAV enrollet :

Pellgargañ a raimp war <http://afea.free.fr> pe <http://keit-vimp-bev.info>.

Postit ur bladenn deomp mar plij.

Graet d'a

E

Sinadur :